
PENNDIVIZOÙ

- SERVIJ TREIÑ-ALIAÑ

Er skrid-mañ e tegasomp soñj eus pourchasoù ha mont en-dro servij Treiñ-Aliañ Ofis ar Brezhoneg hag eus an doare d'ober evit goulenn ul labour ouzh ar servij ha dre-se magañ fiziañs en eil hag egile. Pep goulenner a rank sevel a-du-krenn gant ar penndivizoù-mañ.

1. Hor pourchasoù

Treiñ a reomp pe adlenn a reomp pa vezomp sur e vo gwelet disoc'hoù al labourioù er vuhez foran ha pa dalvezint da gas ar brezhoneg war-raok un tamm bennak : panneloù, dafar kehentiñ, lec'hiennoù Kenrouedad, diskouezadegoù pe katalogoù, da skouer... N'emañ ket an treiñ lennegel e-barzh kefridi an Ofis. Miret e vez evit aozadurioù all pe troerien dizalc'h. Peurliesañ ne droomp ket teulioù diabarzh an aozadurioù pe an hiniennoù barrek d'ober war-eeun hag o-unan gant ar brezhoneg. A-du all e kinnigomp dezho, gant ur spered a servij foran, skoazellañ anezho da zirouestlañ kement poent ereadurel pe dermenadurel zo pe neuze ober ur sell war reizhskrivadur o zeulioù brezhonek.

2. Hor gouestloù

Dre m'eo tonket an teulioù pe an testennoù a droomp da vezañ embannet pe lakaet war wel d'an holl e taolomp evezh bras ouzh doare hol labourioù hag e roomp kalz a bouez da stumm an teulioù echu. Ne reomp ket gant sistemoù treiñ emgrefe. War-bouez ur merer testennoù pe ul loger e vo kaset al labourioù da benn gant troerien mestroniet ar yezh ganto hag a oar reiñ e brezhoneg skrivet (reizhskriverezh vodern) ur prezeg gallek pe saoznek en-dro, gant ar stumm, an termennoù hag al live yezh a zere outañ. An holl droidigezhioù a vez adkempennet meur a wezh ivez ha graet ur sell warno pe evezhiet da ziwezhañ gant un den e karg a-benn bezañ sur eo mat ar prezeg e brezhoneg.

3. Urzhiañ

- Pep goulenn treiñ a rank bezañ kaset dre skrid hag a-gevret e tle bezañ an teul pe an teulioù da dreiñ en ur fichennaoueg stag dre bostel pe enrollet war ur bladennig dre lizher. Dindan ar stumm WORD e rank bezañ kement fichennaoueg zo. Aliañ a reomp ar c'houlennerien da embann splann pal an droidigezh a fiziont ennomp (dafar implijet – panneloù, skritelloù, follennoù-pleg hag all... – ha lec'h – kêr ha lec'hiadur resis – ma vo gwelet an droidigezh...) hag ivez pegoulz e vefent laouen da resev an droidigezh. Kuzh e chomo an ditouroù a vo bet teurvezet reiñ d'ar servij. O vezañ ma vagomp preder da gas labourioù a-zoare eo brav gouzout n'omp ket evit kas troidigezh un destenn war-dro 500 ger enni dindan nebeutoc'h eget 7 devezh labour et adalek deiziad sinadur an asant.
- Ne gasomp rakpriz na kinnig termen ebet – e-kerzh ar 24 eurvezh da-heul – nemet goude bezañ resevet an holl deulioù da dreiñ, kinniget sklaer ha peurechu e galleg (pe saozneg). Aliañ a reomp ar c'houlennerien da chom hep kas meur a stumm disheñvel eus an destenn a fell dezho lakaat treiñ rak mar befe graet e vefe kollet amzer ganto o c'houlenn digant an droerien cheñch dizehan o zroidigezh hag en arvar e vefent da lezel fazioù en destenn echu. Ouzhpenn-se, mar c'hoarvezfe an dra-se ne vefe ket ar servij treiñ evit kas al labourioù e koulz.
- Ar ger e galleg (pe saozneg) eo unvez kontañ an troidigezhioù (s.o. ar prizioù e talvoud).
- Ne grog an droerien gant al labourioù nemet goude asant ar goulenner. Setu ma rank pep goulenner reiñ da c'houzout sklaer e asant dre adkas dimp dre belleiler pe dre lizher, ar rakpriz sinet ha merket ar meneg "asantet" warnañ.

Degas a reomp da soñj ne vefemp ket evit kas da benn vat troidigezh un destenn war-dro 500 ger enni dindan nebeutoc'h eget 7 devezh labour et.

4. Treiñ teknikel

Brav eo gouzout e c'hall bezañ diaes treiñ teulioù teknikel. Testennoù berr a c'hall bezañ hir da dreiñ ivez, daoust d'ar soñjoù kontrol a-wezhioù. Rankout a reomp embann ivez ez eus e brezhoneg kalz tachennoù termenadurezh a zo bet boulc'het mat met alies e chomont war sevel c'hoazh. Kreizenn Dermenadurezh TermBret Ofis ar Brezhoneg zo he fal kas al labour-se da benn. Evit kement teuliad treiñ a zo e vez graet un enklask termenoù ha savet ur spisc'heriadur a vez enrollet goude-se en un diaz roadennoù. Talvoudus eo an ditouroù-se evit an troidigezhioù da zont. War grenn-dermen ec'h embann Ofis ar Brezhoneg geriaouegi brasskignañ diwar ar vemor-se. Gouzout a-walc'h e rank ar c'houlennerien e vo gwelloc'h un droidigezh ma vez kaset da benn gant un troer a oar mat eus sujedoù an destenn orin. Ne vint ket souezhet eta, dinedc'het ne lavaromp ket, ma teu un troer eus ar servij e darempred ganto en-dro, da c'houlenn sklaeraat pennadoù a zo, da c'houzout hiroc'h diwar-benn ur gendestenn, a-zivout doare un teul pe da glask kaozeal diwar-benn tachenn pe dachenn arbennik gant un den gouiziek; seul vuioe'h a amzer a vo ha seul vui ma vo maget darempredoù reoliek hag a fiziañs, seul welloc'h e vo an disoc'h.

5. Kas

D'an deiziad kendivizet er rakpriz e vez kaset an teulioù troet. Koulskoude ne zle ket ar servij treiñ bezañ pennkaoz d'an dale a c'hallfe bezañ abalamour da sac'hadennoù servijer ar c'houlennerien, da gudennoù ar pourvezer moned d'ar Genrouedad pe da rouestladennoù servijoù ar Post.

6. Heuliañ

Evit ma vo peurlvat al labour e ranker gallout adlenn an amprouennoù a-raok moullañ pe embann (panelloù, plaketennoù, kraflevrioù, lec'hiennoù Kenrouedad, levrioù...) : ur bennreolenn eo, kuit a lezel vioù-koukoug ha chom hep ober gant reolennoù tipografiezh ar brezhoneg, disheñvel diouzh re yezhoù all. Da skouer e vefe deuet fall disoñjal un dildenn war un "n" pe dispartiañ ar "z" diouzh an "h" abalamour d'un droc'h-gwerzenn diampart.

7. Kiriegezh

Ma vefe traoù da adwelet en un droidigezh da-heul cheñchamantoù bihan degaset en destenn orin, pe ma ne vefe ket stumm un droidigezh hervez c'hoant ar goulenner pe un trede den e rankfe ar goulenner pe an trede den-se mont e darempred dre skrid gant Ofis ar Brezhoneg ha n'eo ket gant unan all. Gant ar skipailh fiziet an teuliad ennañ ha sterniet gant rener Ofis ar Brezhoneg emañ ar c'harg da adaozañ e labour pe da zisplegañ e zibaboù.

8. Paeañ

Kement tra cheñchet pe ouzhpennet en teul orin a vo dalc'het kont anezhañ evit ar priz hag an deiziad kas. Goude an droidigezh e vo kaset ar facturenn. O vezañ ma n'eo ket endalc'het Ofis ar Brezhoneg d'an T.G.O., ne c'hell ket e lakaat war wel war e facturenn. Gant ur chekenn vank, Post pe dre dreuzkasadenn vank (DAB Niv. 15589-29703-03709551140-65) e ranker paeañ, dindan 30 devezh, war anv Ofis ar Brezhoneg - 8 bis, straed Felix Faure - 29270 KARAEZ-PLOUGËR.

EVIT MONT E DAREMPRED GANT AR SERVIJ TREIÑ-ALIAÑ

 KARAEZ	 ROAZHON
8 bis, straed Félix Faure 29270 KARAEZ-PLOUGËR ☎ : 02 98 99 30 17 📠 : 02 98 99 30 19 ✉ : tro.ofisk.bzh@wanadoo.fr	10, straed Naonediz 35000 ROAZHON ☎ : 02 23 44 04 37 📠 : 02 23 44 04 39 ✉ : rozenn.ofisr.bzh@wanadoo.fr